

Prezegenn dre gan



1. Ar rannoù
2. Diougan Gwenc'hlan
3. An aotrou Nann hag ar gorrigan
4. Ar bugel lec'hiet
5. Gwin ar C'hallaoued
6. Bale Arzhur
7. Bosenn Eliant
8. Marzhin en e gavell
9. Lez-Breizh
10. Ar falc'hun
11. Loeiza hag Abalard
12. An distro a Vro-Saoz
13. An alarc'h
14. Seziz Gwengamp
15. Jenovefa Rustefan
16. Pennhêrez Keroulaz
17. Marv Pontkalek
18. Gwerz Skolvan

AR RANNOU

An drouiz

- Daik mab gwenn Drouiz, ore
Daik petra fell dit-te ?
Petra ganin-me dit-te ?




Ar bugel

- Kan din eus a ur rann, ken a oufen bremañ




An drouiz

- Ur rann, ur red hepken
Ankoù tad an anken
Netra kent netra ken



- Daik mab gwenn Drouiz ore
Daik petra fell dit-te ?
Petra ganin-me dit-te ?



...



Ar bugel

- Kan din eus a ziv (... zaouzek) rann Ken a oufen bremañ
- Daouzek miz daouzek arouez, an diwezhañ an diwezh, saezher hellink flemm e saezh,
Daouzek arouez en em zrailh, ar vuoc'h wenn ar vuoc'h zu-bailh, o tonet eus koad an ispailh, flemm ar saezh en he c'herc'henn, he gwad o redek ouzhpenn, o vlejal-hi sonn he fenn, korn o son boud tan ha taran, glav hag avel taran ha tan ! Tra ken mui-ken tra na rann !
- Unnek beleg houarnennet, o tonet eus a Wened, gant o c'hlezeier torret
Hag o rochedoù gwadek, prenn-kelvez da vazh-loaek, eus a dri c'hant o unnek
- Dek lestr tud c'hin a weled, o tonet eus a Naoned, Gwa c'hwi gwa c'hwi tud Gwened !
- Nav dornig gwenn war daol leur, e-kichen tour Lezarmeur, ha nav mamm o keinañ meur e koroll nav c'horrigan, bleuñvek o blev gwisket gloan, kelc'h ar feunteun d'al loar-gann
Gwiz hag he nav forc'hell all, e toullig dor an houc'hzal, o soroc'hal o turial,
O turial o soroc'hal, torc'h torc'h torc'h d'ar wezenn aval, an hoc'h kozh d'ho tiorren
- Eizh avel o c'hwibanat, eizh tan gant an tantad, e miz mae e menez kad
Eizh annoar wenn-kann-eon, o peuriñ en enez don, eizh annoar wenn d'an itron
- Seizh heol ha seizh loar, seizh planedenn gant ar yar, seizh elfenn gant bleud an aer
- C'hwec'h mabig graet e koad, poellet gant galloud loar, ma n'ouzez-te me oar, c'hwec'h louzaouenn 'r perig meskañ 'r gaoter 'ra 'r c'horrig, en e c'henou e vizig
- Pemp gouriz an douar, pemp darn en hoal, pemp maen war hor c'hoar
- Pevar maen higoliñ, maen higoliñ da Varzhin, higoliñ klezier vlin
- Teir rann er bed-mañ a vez, tri deroù ha tri diwezh, d'an den ha d'an derv ivez
Teir rouantelezh Varzhin, frouezh melen ha bleuñv lirzhin, bugaligoù o c'hoarzhin
- Daou ejen diouzh ur gibí, o sachañ o souhetiñ, edrec'hit an estoni !
- Ur rann, ur red hepken, Ankoù tad an anken, Netra kent netra ken

DIOUGAN GWENC'H LAN

**Pa guzh an heol, pa goeñv ar mor
Me a vez o kanañ war dreuz va dor**

**Pa oan yaouank me a gane
Pa 'z on deuet kozh, me gan ivez.**

**Me gan en noz, me gan en deiz
Ha me ankeniet-bras koulskoude.**

**Mard eo ganin stouet va beg,
Mard em eus keuz n'eo ket hep abeg**

**Evit aon me n'em eus ket,
N'em eus ket aon da vezañ lazhet ;**

**Evit aon me n'em eus ket,
Amzer a-walc'h ez on-me bet**

**Pa vin ket klasket vin kavet ;
Ha pa vezin galvet ne zeuin ket**

**Ne vern petra a c'hoarvezo
Ar pezh a zo dleet a vezo**

**Ret eo d'an holl mervel teir gwech
Kentoc'h evit arsav en diwezh**

Me wel an hoc'h o tont eus ar c'hoad,
Hag eñ gwall gamm, gwallet e droad,

E veg digor ha leun a wad
Hag e reun louedet gant an oad

Hag o soroc'hal war e dro
Gant an naon e voc'higoù

Me wel ar morvarc'h 'n e enep o tont
Ken e kren an aod gant ar spont ;

Hag eñ ken gwenn hag an erc'h kann
Zo en e benn kerniel arc'hant

An dour dindanañ o virviñ
Gant an tan taran eus e fri

Morvirc'hed en-dro dezhañ ken stank
Hag ar geot war lez ar stank

- Dalc'h mat 'ta ! Dalc'h mat 'ta ! Morvarc'h !
Dalc'h war e benn ! Dalc'h mat 'ta ! Dalc'h !

Ken e riskl er gwad an treid noazh !
Gwazh ouzh gwazh ! Dalc'h 'ta ! Gwazh ouzh gwazh !

Me wel ar gwad betek e c'hlin,
Me wel ar gwad evel ul lenn !

Gwazh ouzh gwazh ! Dalc'h 'ta ! gwazh ouzh gwazh !
Arsaviñ a ri benn arc'hoazh

Dalc'h mat 'ta ! Dalc'h mat 'ta ! Morvarc'h !
Dalc'h war e benn, dalc'h mat 'ta, dalc'h !

Pa oan em bez yen hunet dous
Klevis an erer o c'hervel en noz,

Eñ a c'halve a ereredigoù
Hag holl evned eus an neñvoù ;

Hag e lâre dre o gervel
- Savit prim war ho tivaskell !

N'eo ket kig brein chas pe zeñved,
Kig kristen a rankomp kavet !

- Morvran gozh, klev ! lavar din-me :
Petra c'hoari ganit aze ?

- Penn ar Penn-lu c'hoari ganin,
E zaoulagad ruz a fell din,

E zaoulagad a grapan naet
'N abeg d'az re en deus tennet.

- Na te, louarn, lavar din-me
Petra c'hoari ganit aze ?

- E galon a c'hoari ganin
Oa ken diwir ha va hini,

He deus drouk c'hoantaet da lazhañ,
He deus da lazhet a bell 'zo

- Na te, lavar din-me, touseg !
Petra rez aze e korn e veg ?

- Me a zo amañ 'n em lakaet
O c'hortoz e ene da zonet ;

Ennon-me 'vo, tra vin er bed,
E kastiz reizh eus e dorfed

E-keñver ar Barzh na chom ken
Etre Roc'h Allaz ha Porzh gwenn

AN AOTROU NANN HAG AR GORRIGAN

An aotrou Nann hag e bried
Yaouankik-flamm voe dimezet,
Yaouankik-flamm dispartiet.

An itron he deus ganet dec'h
Daou vugel ken kaer hag an erc'h ;
Unan zo paotr, an all zo merc'h.

- Petra c'houl ho kalon a vad,
Pa'c'h eus ganet ur mab d'e dad ?
Livirit, m'her roy deoc'h timat :

Kig kefeleg a stank an diaz,
Pe kig karv ar forest c'hlas ?

- Kig karv eo a gavfen mat ;
Hogen poan vezo mont d'ar c'hoad.

An aotrou Nann pa he c'hlevas,
En e c'hoaf derv a grogas,

Ha war e varc'h du a lammas,
Ha d'ar forest c'hlas ez eas.

War lez ar c'hoad pa oa degouezhet,
Un heizez wenn en deus gwelet ;

Hag eñ mont buan war he zro
Ken grene 'n douar dindano ;

Hag eñ mont war he lerc'h raktal
Ken rede an dour diouzh e dal,

Ha diouzh e varc'h a bep kostez,
Ken a zeuas an abardaez ;

Ken a gavas ur wazh vihan
E-kichen ti ur Gorrigan,

Ha tro-war-dro un dachenn flour ;
Hag eñ da ziskenn d'evañ dour.

Ar Gorrig oa tal he feunteun
O kribañ he blev hir melen,

Hag o c'hribe gant ur grib aour
('n itronezed-se n'int ket paour.)

- Penaos out-te ken dievezh
Da zont da strafuilhañ va gwazh !

Dimeziñ din bremañ rafet,
Pe e-pad seizh vloaz e sec'hfet ;
Pe a-benn tri deiz e varvfet.

- Dimeziñ deoc'h me ne rin ket,
Rak ur bloaz 'zo on dimezet ;

Da zisec'hif ne chomin ket,
Na 'benn tri deiz ne varvin ket ;

Ne varvin ket a-benn tri deiz,
Nemet pa vezo youl Doue ;

Met gwell eo din mervel bremañ
Eget dimeziñ d'ur Gorrigan !

- Va mammig kaezh, ma'm c'haret,
Aozet va gwele ma n'eo ket ;
Gant ar c'hleñved ez on dalc'het.

Na livirit tra da'm fried,
A-benn tri deiz e vin beziet ;
Gant ur Gorrigan on bet skoet.

Hag a-benn tri devezh goude
Ar wreg yaouank a c'houlenne :

- Livirit din-me va mamm-gaer,
Ha perak e son ar c'hleier ?

Perak e kan ar veleien
War al leur-zi, gwisket e gwenn ?

- En noz-mañ mervel en deus graet
Ur paour-kaezh hor boa kemeret.

- Va mamm-gaer din-me leveret,
Va aotrou Nann pelec'h eo aet ?

- E kêr va merc'hig ez eo aet ;
E berr e teuio d'ho kwelet.

- Va mamm-gaer gaezh, livirit din,
Ruz pe c'hlas d'an iliz ez in ?

- Va merc'hig, deuet eo ar c'hiz
Da vont gwisket du d'an iliz.

Pazenn ar vered pa dreuzas,
Bez he fried paour a welas.

- Pe re hon dud-ni zo marvet,
Pa'z eo hon douar-ni fresket ?

- Siwazh ! va merc'h, n'hallan nac'h mui,
Ho pried paour a zo enni !

War he daoulin en em strinkas,
Ha biken goude ne savas.

Burzhodus vije da welet,
An noz goude ma oa laket
An itron e bez he fried.

Gwelet div wezenn derv sevel
Diouzh o bez nevez d'an uhel ;

Ha war o brank div goulmig wenn,
Hag i ken drev ha kel laouen,

Eno o kanañ da c'houlou-deiz,
Hag o nijal d'an neñv goude.

AR BUGEL LEC'HIET

Mari goant a zo keuziet
He Laou vihan he deus kollet
Gant ar Gorrigan eo aet

"Petra rit-hu aze, va mamm ?"
Lavare ar c'horr gant estlamm
"Petra rit-hu aze, va mamm ?"

"Pa 'z is davet dour d'ar stivell
Va Laouig lezis er c'havell
Pa zeuis d'ar gêr eñ oa pell

- Petra 'ran amañ, va mab-me ?
Birviñ a ran en ur bluskenn vi
'vit an dek gounideg eus va zi

Al loen-mañ en e lec'h lakaet
E veg ken du hag un touseg
a graf, a beg, hep ger ebet

- 'vit dek, mamm gaezh, en ur bluskenn !
welis vi kent gwelout yar wenn
welis mez kent gwelout gwezenn

Ha bron bepred 'mañ klask kaouet
Hag en e seizh vloaz eo aet
Ha n'eo ket c'hoazh dizonet

welis mez hag welis gwial
welis dervenn e koad Brezal
Biskoazh ne welis kemend-all

Gwerc'hez Vari, war ho tron erc'h,
Gant ho krouadur 'tre ho tivrec'h
E levezet 'maoc'h, me en nec'h

- Re a draoù a weles-te, va mab
Da flap ! da flip ! da flip ! da flap !
Da flip ! paotr kozh ! ha me da grap !

Ho mabig sakr c'hwi a viras
Me, ma hini me a gollas
Truez ouzhin, mamm a druez !

- Sko ket gantañ, lez-eñ ganin
Ne ran-me droug da da hini
'mañ o ren er vro-ni warnomp ni"

- Ma merc'h, ma merc'h, na nec'hit ket
Ho Laouig ned eo ket kollet
Ho Laouig ker a vo kavet

Mari d'ar gêr pa zistroas
He bugel kousket a welas
En e gavell, ha sioul eas

Neb 'ra van virviñ e glorenn vi
Evit dek gounideg un ti
a lak' ar c'horrig da brezegiñ

Hag outañ ken kaer pa selle
Ha da boket dezhañ pa'z ae
E zaoulagad a zigore

Pa 'n deus prezeget flemm-eñ, flemm !
Pa eo flemmet ken a glemm
Pa eo klevet e lammer lemm"

En e goazet en em save
He zivrec'hig dezhi astenne
"Gwall bell on bet kousket, mamm-le !"

I-GWIN AR C'HALLAOUED

Gwell eo gwin gwenn barr
Na mouar !
Gwell eo gwin gwenn barr

TAN ! TAN ! DIR ! O ! DIR !
TAN ! TAN ! DIR HA TAN TAN TAN
TANN ! TANN ! TIR ! HA TONN
TONN ! HA TIR HA TANN !

Gwell eo gwin nevez
O ! na mez
Gwell eo gwin nevez

Gwell eo gwin a lufr
O ! na chufere
Gwell eo gwin a lufr

Gwell eo gwin ar Gall
Nag aval
Gwell eo gwin ar Gall

Gall, dit, kef ha deil
Dit pezh teil !
Gall, dit, kef ha deil

Gwin gwenn, dit, Brezhon
A galon !
Gwin gwenn, dit, Brezhon

Gwin ha gwad a red
A-gevret
Gwin ha gwad a red

Gwin gwenn ha gwad ruz
Ha gwad druz
Gwin gwenn ha gwad ruz

Gwad ruz ha gwin gwenn
un aourenn !
Gwad ruz ha gwin gwenn

Gwad ar C'hallaoued
Eo a red
Gwad ar C'hallaoued

Gwad ha gwin 'evis
Er gwall vrizh
Gwad ha gwin 'evis

Gwin ha gwad a vev
Nep a ev
Gwin ha gwad a vev

II- KOROLL AR C'HLEZE

Gwad gwin ha koroll
Dit, Heol !
Gwad gwin ha koroll

Ha koroll ha kan,
Kan ha kann !
Ha koroll ha kan,

Koroll ar c'hleze,
Hennezh eo
Koroll ar c'hleze,

Kan ar c'hleze glas
A gar lazh'
Kan ar c'hleze glas

Kann ar c'hleze gouez
Ar Roue
Kann ar c'hleze gouez

Kleze ! Roue bras
Ar stourmaz
Kleze ! Roue bras

Kanevedenn gen
War da benn !
Kanevedenn gen !

BALE ARZHUR



Deomp, deomp, deomp, deomp, deomp, deomp d'ar gad !
Deomp kar, deomp breur, deomp mab, deomp tad !
Deomp, deomp, deomp holl, deomp 'ta tud vat !

Mab ar c'hadour a lavare
Lavare d'e dad, ur beure :
"Marc'hegerien war lein ar bre !"

Marc'hegerien o vont e-biou
Mirc'hed dindane, glas o liv,
Oc'h hinteal gant ar riv !

Stank-ha-stank, e renk, daou-ha-daou,
O vont da heul ar bannieloù
Hag a vrafsell glan an Ankoù

Stank-ha-stank, e renk tri-ha-tri
Stank-ha-stank, c'hwec'h-ha-c'hwec'h, e riz
Mil goaf ouzh an heol o lintriñ

Nav bann roug an daou benn anezhe
Bagad Arzhur, a oaran, eo
Arzhur a-raok lein ar menez

Mard eo Arzhur an hini eo
Prim d'hor gwareg ha d'hor gwal bev
Deomp d'e heul, ha flemm ra flev !

Oa ket e c'her laosket a-grenn
Pa drouzkrozas ur youc'hadenn
Gant ar menezioù penn-da-benn

Kalon am lagad ! penn am brec'h !
Ha lazh am bloñs, ha traoñ ha krec'h
Ha tad am mab, ha mamm am merc'h !

Marc'h am kazeg, ha mul am azen !
Penn-lu am hael, ha den am gwaz !
Gwad am daeroù, ha tan am c'hwezh !

Ha tri am unan, evit mat !
Traoñ ha krec'h, noz-deiz, ma c'hall pad
Ken a redo en traoñioù gwad !

Er stourmad treuzet mar kouezhomp
Gant hor gwad en em vadezfomp
A laouen galon e varvfomp

Ma varvomp evel vez dleet
D'ar gristenien, d'ar Vretoned,
Morse na varvimp re abred !

BOSENN ELIANT

♩=144 Tre Lan-go - len hag ar Fa - ouet Ur barzh san
 - tel a vez ka - vet Ur barzh san - tel a vez ka
 - vet Hag eñ Tad Ra-si - an an - vet

1. Etre Langolen hag ar Faoued
Ur barzh santel a vez kavet (2 w.)
Hag eñ Tad Rasian anvet
2. Lâret en deus da Faouediz :
"Lakait un oferenn bep miz (2 w.)
Un oferenn en hoc'h iliz"
3. Aet eo ar vosenn a Eliant
Hogen n'eo ket aet hep damant (2 w.)
Aet eo ganti seizh mil ha kant
4. E bro Eliant, hep lâret gaou,
Eo diskennet an Ankoù (2 w.)
Marv eo an holl dud nemet daou
5. Ur wregig kozh tri-ugent vloaz
Hag ar mab nemetañ he devoa (2 w.)
O-daou hepken int chomet en o sav
6. "Edo ar vosenn penn va zi :
Pa garo Doue teuio en ti (2 w.)
Ni yelo kuit pa zeuio", emezi
7. E kreiz Eliant, er marc'hallac'h,
Geot da falc'hat a gavfec'h
Nemet en hentig eus ar c'harr
A gas ar re varv d'an douar
8. Kriz a galon nep na ouelje,
E kreiz Eliant, neb a vije :
o welout triwec'h karr e-tal ar vered
Ha triwec'h all eno o tonet
9. Lec'h ma oa nav mab en un tiad
ez aent d'an douar en ur c'harrad (2 w.)
Hag o mamm baour ouzh o charreat
10. O zad a-dreñv o c'hwibanat
Kollet ma oa gantañ e skiant-vat
Hi a c'harme, a c'halve Doue
Reuziet e oa korf hag ene
11. Nav mab am boa, am boa-me ganet
O nav gant an Ankoù int aet
Gant an Ankoù e toull va dor
Ha den da skuilhañ din ul lommig dour !
12. Lakait va nav mab en douar
Ha me roy deoc'h ur gouriz koar
A ray teir zro en-dro d'ho ti
Ha teir zro en-dro d'ho minic'hi
13. Leun eo ar vered a-rez ar c'hleuzioù
Leun an iliz a-rez an treuzoù
Ret eo bennigañ ar parkoù
Da lakaat enno ar c'horfoù
14. Me wel er vered un dervenn
Hag en he beg ul liñsel wenn (2 w.)
Marv eo an holl dud gant ar vosenn

MARZHIN EN E GAVELL

1. Bremañ trizek miz ha teir zun (2 w.)
e oan dindan ar c'hoad e hun

**O ! hun eta, va mabig, va mabig
Hun eta, toutouig la la**

2. Klevis o kanañ ul labous (2 w.)
'gane ken flour, 'gane ken dous

O ! hun eta...

3. 'gane ken dous, 'gane ken flour
Flouroc'h eget hiboud an dour

4. Kement ma'z is d'e heul, dibred,
Touellet gantañ va spered

5. D'e heul pell, pell, pell, pell ez is
Siwazh, siwazh ! d'am yaouankiz !

6. "Merc'hig roue", a lavare
"Kaer out evel glizh ar beure"

7. Ar gouloù-deiz zo souezhet
Pa sell ouzhit, ne ouzout ket

8. Pa bar an heol, souezhet eo
na piv a vo da bried te ?

9. Tavit, tavit, kozh labousig
C'hwi zo gwall lik en ho pegig

10. Ma sellfe lez Roue ouzhin
Gant gouloù-deiz mann na lakfen

11. Na lakfen mann gant sell an heol
Kennebeut gant sell ar bed holl

12. Mar komzit din eus dimeziñ
Komzit eus Roue an neñv din

13. Kan' rae kaer ouzh kaer evelkent
Ha me d'e heul, souchet va fenn

14. Ken e kouezhis skuizh stank kousket
Dindan un dervenn, er gwasked

15. Hag eno em boe un huñvre
am sabatuas betek re

16. E oan e-barzh ti un Duzig
A-dro-war-dro ur feunteunig

17. E vein ker boull ! e vein ken sklaer !
E vein ken splann evel ar gwer !

18. Ur gwiskad man war al leur-zi
Ha bleuñv nevez strewet warni

19. An Duzig ne oa ket er gêr
Ha me diogel ha seder

20. Pa welis o tont eus a-bell
Ur durzhunell a-denn-askell

21. Hag e stokas gant he begig
Ouzh moger voull ti an Duzig

22. Ha me sot, gant truez outi,
Mont da zigor an nor dezhi

23. Hag hi e-barzh, ha da rodal
Tro-war-dro d'an ti, o nijal

24. Gwech war va skoaz, gwech war va fenn,
Gwech e nije war va c'herc'henn

25. Teir gwech ouzh va skouarn e pokas
Hag hi kuit en-dro d'ar c'hoad glas

26. Mar oa drev hi, me ne oan ket
Mallozh d'an eur ma oan kousket

27. An daeroù ver diouzh va lagad
Pa rankan kavell luskellat

28. A-youl vefe gaou va huñvre !
Na ouife den diouzh va doare !

29. A-youl vefe en ifern skorn
An Duziged, kig hag askorn !

30. Ar mab, hag eñ nevez ganet,
o c'hoarzhin en deus diskanet :

31. Tavit, va mamm, na ouelit ket,
Ganin n'ho po preder ebet

32. Nemet em eus gwall galonad
'vefe graet Duzig diouzh va zad

33. Va zad a gar an tudoù keizh
Ha pa gav an tu, o gwarez

34. Etre an neñv hag an douar
Va zad zo ker kann hag al loar

35. Ra viro Doue da viken
Va zad diouzh puñs an ifern yen !

36. Nemet bennozh a ran d'an eur
e voen ganet evit an eur

37. e voen ganet evit eur va bro
Doue diouzh anken d'he miro !

38. Ar vamm hag hi souezhet-bras :
"Hemañ zo marzh mar boe biskoazh !"

MARKIZ LEZOBRE

♩=100 E-tre Koad ar Skin ha Le-zo - bré A zo bet as-

- si - gnet eun ar - mé A zo bet as - si - gnet eun ar - mé

1. Etre Koad ar Skin ha Lezobre
Ez eus bet savet un arme (2 w)
2. An Aotrou Koad ar Skin a lavare
Da Varkiz Lezobre a-neuze
3. Bet em euz galloud gant ar Roue
Da zonet da lazhañ Lezobre
4. Mar t'eus bet ar galloud digantañ
Diskouez din ta da c'halloud amañ
5. Ma n'ec'h eus ket anavezet ma zad
Me a ray dit anavezet e vab
6. Disterañ taol kleze a skoe
Hanter-kant d'an douar a gouezhe
7. Ar Roue Frañs p'en doa klevet
D'e floc'hig bihan n'oa lavaret
8. It da lavaret da Lezobre
Da zonet amañ da gomz ganin
9. E ti ar Roue pa erruo
Morian ar Roue e kombato
10. Dibr din eta ma inkane gwenn
Laka ur brid arc'hant en e benn
11. Dibr din ma inkane buanañ
Ma 'z in diouzhtu da Santez Anna
12. N'on ket c'hoazh trivec'h bloaz echuet
Hag en trivec'h kombad ez on bet
13. Sur hemañ a vo an diwezhañ
Ma n'em sikourit Santez Anna
14. Boñjour deoc'h Roue ha Rouanez
D'ho kwelet on deut en ho palez
15. Markiz Lezobre din-me lârit
Ha ma morian a gombatot ?
16. Lazhet voe morian ar Roue
Glac'haret an holl a gement-se
17. Sed aze me sin war baper gwenn
E c'hallez bale e pep tachenn

AR FALC'HUN

♩=120 Ta - get ar yar gant ar fal - c'hon, Gant ar goue-rez la-zhet ar
 c'hont; La - zhet ar c'hont, gwas - ket an dud,
 An dud paour e-vel lo-e-ned mut

Taget ar yar gant ar falc'hun,
 Gant ar gouerez lazhet ar c'hont ;
 Lazhet ar c'hont, gwasket an dud,
 An dud paour evel loened mut

Gwasket an dud, mac'het ar vro
 Gant alouberien arall vro,
 Gant alouberien a vro C'hall,
 An Drederannerez oc'h hengial

Mac'het ar vro, ha savet kroz,
 Savet yaouank, ha savet kozh ;
 War varv ur yar hag ur c'hont,
 Breizh e gwad, e tan hag e kañv

War Venez Du, da ouel Yann mat,
 Tregont kouer en-dro d'an tantad.
 Ha Kado Gann, eno gante,
 War e forc'h houarn a harpe.

- Petra lârit-c'hwi, paotred yod
 Ha paeañ ar gwirioù a reot ?
 Evidon-me na baen ket !
 Gwell e vefe ganin bezañ krouget

- Evidon na rin kennebeut !
 Noazh va faotred, va chatal treut ;
 Na rin ket m'hen tou ruz glaou tan,
 War Sant Kado kerkoulz ha Sant Yann !

- Me, va danvez a ya da goll,
 ez an da goll en holl d'an holl ;
 Kent na vo ar bloaz echuet,
 E vo ret din mont da glask va boued

- Da glask ho poued na 'z eot ket,
 A-du ganin ne lâran ket ;
 Mard eo trouz ha kann a glaskont
 Kent na vezo deiz e kavfont !

- Kent an deiz kavfont trouz ha kann
 An hini m'hen tou mor ha taran !
 An hini m'hen tou stered ha loar !
 An hini m'hen tou neñv ha douar !

Hag eñ da gemer ur skod-tan
 Ha pep en ur skod eveltañ ;
 - En hent, paotred, en hent bremañ !
 Ha prim etrezek Stank Roc'han

E wreg gantañ er penn a-raok,
 Ganti war he skoaz zehou ur c'hrog,
 Hag hi o kanañ dre ma 'z ae :
 Timat ! timat ! va bugale !

- N'eo ket 'vit mont da glask o boued,
 Em eus va zregont mab-me ganet ;
 N'eo ket evit dougen keuneud,
 O ! na mein-benerezh kennebeut !

- N'eo ket evit dougen o samm
 Ez int bet ganet gant ho mamm,
 N'eo ket evit pilat lann glas,
 Pilat lann kriz gant o zreid noazh ;

- N'eo ket a-hend-all evit peuriñ
 Roñseed, chas-red hag evned kriz :
 Nemet da lazhañ ar vac'herien,
 Em eus-me ganet va mibien !

Hag eus un eil tan d'egile
 Ez aent, hed-ha-hed ar menez :
 Timat ! timat ! bout ! bout ! you ! you !
 Ha tan ruz war wizen ar gwirioù !

O tont d'an traoñ gant ar menez
 Tri mil ha kant a oa anezhe ;
 Ha pa oant degouezhet e Langoad,
 E oant nav mil en ur bagad.

Pa oant degouezhet e Stank Roc'han,
 E oant tregont mil ha tri c'hant ;
 Ha Kado a c'harmas neuze :
 Erru omp 'ta ! amañ 'n hini eo !

N'oa ket e gomz peurlavaret,
 Tri c'hant karrad lann oa kaset
 Ha lakaet tro-war-dro d'ar gêr,
 Hag an tan enni foll ha taer ;

Un tan ken foll, un tan ken taer
 Ma teuze ennañ ar ferc'hier,
 Ma strake ennañ an eskern
 Evel ar re zaonet en ifern.

Ma yudent gant kounnar, en noz
 Evel bleizi kouezhet er foz ;
 Antronoz pa savas an heol,
 E oa ar wirierien luduet holl.

Loeiza hag Abalarð

♩=120 Ne oan ne - met daou - zek vloaz pa gui-tis ti ma
zad Pa gui-tis ti ma zad Pa oan aet gant ma
c'hloa-reg La la lan la la ri la Pa oan aet gant ma
c'hloa-reg, ma A - ba - lar-dig mat

1. Ne oan nemet daouzek vloaz pa guitais ti va zad,
Pa guitais ti va zad
Pa oan aet gant va c'hloareg, La la La la La li la
Pa oan aet gant va c'hloareg, va Abalardig mat.
2. Pa oan-me aet da Naoned gant va dousik kloareg
Gant va dousik kloareg
Ne ouien yezh, va Doue, La la La la La li la
Ne ouien yezh, va Doue, nemet ar brezhoneg ;
3. Ne ouien tra, va Doue, met lâret va fater,
Pa oan-me plac'hig vihan e ti va zad er gêr,
4. Hogen bremañ, desket on, desket on mat a-grenn ;
Me oar galleg ha latin, me oar skrivañ ha lenn ;
5. Ya lenn e levr an Aviel ha skrivañ mat ha prezeg
Ha sakriñ ar bara kann kerkoulz ha pep beleg ;
6. Ha mirout ouzh ar beleg a lâret e oferenn,
Ha skoulmañ an akuletenn e kreiz hag en daou benn.
7. Me oar kaout an aour melen, an aour e-touesk al ludu ;
Hag an arc'hant e-touesk an drez, pa 'm bez kavet an tu.
8. Me oar mont da giez du, pe da vran, pa 'm bez c'hoant ;
Pe da baotrig ar skod-tan, pe c'hoazh da aerouant ;
9. Me oar ur son hag a laka an neñvoù da frailhañ
Hag ar mor bras da ziroll, hag an douar da greñañ.
10. Me oar kement tra a zo er bed-mañ da c'houzout,
Kement a zo bet gwechall, kement a zo da zont.
11. Kentañ louzoù 'm boa fardet gant va dousik kloareg,
Oa gant lagad kleiz ur vran ha kalon un touseg ;
12. Ha gant had ar raden glas, e don ar puñs kant gourhed,
Ha gwrizioù an aour geotenn war ar prad dastumet ;
13. Dastumet, diskabell-kaer, d'ar gouloù-deiz a-grenn,
Nemet va hiviz ganin, hag ouzhpenn diarc'hen.
14. Kentañ taolis va louzoù da c'houzout hag eñ oa mat,
A oa e-kreiz park segal an Aotrou an Abad,
15. Diwar driwec'h mentad segal en doa hadet an Abad,
N'en deus bet eñ da zastum nemet div guchennad.
16. Me am eus un arc'hig arc'hant er gêr e ti va zad,
An hini hen digorfe en defe kalonad !
17. Hag ennañ teir naer-wiber o c'horiñ vi un aerouant,
Mar deu va aerouant da vat, neuze vo nec'hamant.
18. Mar deu da vat va aerouant, e vo gwall nec'hamant ;
Seizh lev war-dro ac'hann e teuy da deurel tan.
19. N'eo ket gant kig klujiri na kig kefeleged,
Gant gwad sakr ar re zinamm ez int ganin maget.
20. Ar c'hentañ am boa lazhet a oa e-barzh ar vered,
O vonet d'ar vadeziant, hag ar beleg gwisket.
21. tre ma oa aet d'ar c'hroazhent, e tennis va botoù,
Hag ez is d'e ziveziañ, didrouz, war va loeroù.
22. Mar choman war an douar, ha ganin va gouloù,
Mar chomomp war ar bed-mañ, c'hoazh ur bloavezh pe zaou ;
23. C'hoazh un daou pe dri bloavezh, va dous ha me hon daou,
Ni a lakay ar bed-mañ da dreiñ war e c'henoù.
24. - Eveshait mat, Loeizaig, eveshait d'hoc'h ene,
Mard eo ar bed-mañ deoc'h-c'hwil, da Zoue egile.

AN DISTRO EUS A VRO- SAOZ

Etre parrez poulloregad ha parrez ploare,
Ez eus tuojencil yaouank o sevel un arme
evit monet d'ar brezel oindan mab an Dugez,
en deus dastumet kalz tud eus a bep korn da Vreizh ;

Evit monet d'ar brezel, oreist ar mor da Vro-Saoz.
Me 'm eus ma mab silvestrig emaint ouzh e c'hortoz ;
me 'm eus ma mab silvestrig ha n'em eus nemetañ,
a ya da-heul ar strollad, zant soudarded ar vro-mañ.

Un noz e oan em zuele, ne oan ket kousket mat,
me zlevas merc'hed kerlaz a zane kañv d'am mab ;
ha me sevel em c'hoazez, raktal war va zuele :
- Doue ! silvestrig, pelec'h emhout neuze ?

Uarteze emhout ouzhpenn tri c'hant lev eus va zi,
pe daolet e-barzh ar mor bras d'ar pesked da zebriñ ;
mar karjes bezañ chomet zant da vamm ha da dad,
e vijes bet dimezet bremañ, dimezet mat ;

E vijes bet dimezet hag euredet timent
d'ar zaerañ plac'h eus ar vro, mannaiz poulloregad
da vanna da zousig-koant, a vije zaneomp-ni
ha zant da vugalizoù, trouz zanto leizh an ti.

Me am eus ur zoulmig c'hlas e-kichenik va dor,
hag hi e toull ar zarez, e-penn ar roz e zor ;
me stago ouzh he zouzous, me stago ul lizher
zant seizenn wenn va eured, ra zeuy va mab d'ar zêr.

Sav alese va c'houlmig, sav war da zivaskell
daoust ha te a nijfe, ha te a nijfe pell ?
daoust ha te a nijfe zual bell oreist ar mor bras,
hag ouïfes hag eo va mab, va mab e buhez c'hoazh ?

Daoust ha te a nijfe tre betek an arme,
hag a zaspes eus va mab paour, timent keloù oin-me ?
- Setu koulmig c'hlas va mamm a zane e-kreiz ar c'hoad,
me he zuel erru d'ar wern, me he zuel o rezad.

Curvad deoc'h-c'hui silvestrig, eurvad deoc'h, ha klevet :
damañ em eus ul lizher zo zantin deoc'h kaset.
- 'benn tri bloaz hag un devezh, me erruo da-vad,
'benn tri bloaz hag un devezh, zant va mamm ha va zad.

Chu e oa an daou vloaz, echu e oa an tri :
- kenavo oit silvestrig, me n'az kuelin ket mui ;
mar kavfen da eskern paour daolet zant ar mare,
o sur ! me o dastumfe hag o briatafe.

De oa ket he zent zanti, he zent peurlavaret,
pa skoas ul lestr a Vreizh, war an dou, eñ kollet,
pa skoas ul lestr eus ar vro, penn-da-benn diskaret,
kollet zantañ e roeñvoù hag e wernioù brevet.

Eun e oa a tud varv ; den ne ouïfe lavar,
ha zouzout pezeit amzer zo n'en deus zuelet an douar ;
ha silvestrig oa eno, hozen na mamm na tad,
na mignon n'en doa, siuazh ! karet e zaoulagad.

AN ALARC'H

1. un alarc'h, un alarc'h tramor,
war-lein tour moal kastell arvor !

**ðindindan d'an emgann d'an emgann !
o ðindindan d'an emgann ez an !**

2. nevezinti vat d'ar vretoned !
ha mallozh ruz d'ar c'hallaoued !

3. erru ul lestr e pleg ar mor,
e ouelioù gwenn gantañ digor ;

4. degouezhet an aotrou yann en-dro,
degouezhet eo da ziwall e vro ;

5. d'hon diwall diouzh ar c'hallaoued,
a vac'hom war ar vretoned.

6. ken e laosker ur youc'hadenn,
a ra d'an aod ur grenadenn ;

7. ken e sonn ar menezioù las ;
ha f'rom ha trid ar gazeq c'hlas ;

8. ken e kann laouen ar c'hleier,
kant lev tro-war-dro, e pep kêr.

9. deuet eo an heol, deuet eo an hañv ;
deuet eo en-dro an aotrou yann !

10. an aotrou yann a zo paotr mat ;
ken prim e droad hag e laqad.

11. laezh ur vreizhadeg a sunas,
ul laez ken yac'h evel gwinn kozh.

12. luc'h a daol e c'hoaf p'en horell,
ken e vrumenn an neb a sell.

13. pa c'hoari kleze, ker kreñv e tarc'h,
ken e taouhanter den ha marc'h.

14. ðalc'homp bretoned, ðalc'homp mat
arsav na truez gwad ouzh gwad !

15. skrignal ra bleizi breizh-izel,
o klevout embann ar brezel,

16. o klevout ar youc'h e yudont ;
gant c'hwezh ar c'hallaoued e reont.

17. paotred bro-c'hall lec'h ma kouezhint,
betek deiz ar varn c'hourvezint ;

18. an ðiveradur eus ar gwez
skuilh dour benniget war e vez !

19. [enor enor d'ar gwenn-ha-du
ha d'an ðreitourien mallozh ruz]

SEZIZ GWENGAMP

E-kerzh ar bloaz dek-ha-pevar-ugent
E teuas seziz war Wengamp,
Hag e-kerzh ar bloaz pevar-ugent ha seizh
E oa diskennet ar brezel war Vreizh.

Da borzh Mikael edo ar Saozon
An Alamaned da borzh Roazhon,
Da borzh ar Blomenn an Iwerzhoned
Hag e pep lec'h all ar C'hallaoued.

Porzhier, digorit an nor-mañ !
D'an Aotrou Roc'han zo amañ,
Ha daouzek mil soudard gantañ,
Da lakaat seziz war Wengamp.

An nor-mañ na vo digoret
Na deoc'h na da zen all ebet,
Ken na lâro an dugez Anna,
A zo mestrez war ar gêr-mañ.

Ha digoret vo ar perzhier-mañ
D'ar priñs dinoblik zo amañ
Ha daouzek mil soudard gantañ,
Da lakaat seziz war Wengamp ?

Va dorioù a zo morailhet,
Va mogerioù zo kreñvaet,
Fae eo ganin o c'hlevet
Gwengamp na vo ket kemeret.

Na pa vent triwec'h miz aze,
Na vimp ket kemeret gante
Kargit ho kanol ; ha poan ha bec'h !
Ha gwelomp gant piv ez aio trec'h !

Tregont boled a zo amañ,
Tregont boled 'vit e gargañ
Na poultr na vank, na plom tamm ebet
Na staen evit hen ober kennebeut.

Tre m'edo o tistreiñ ha pignat,
Gant un tenn poultr e voe tizhet,
Gant un tenn poultr dimeus ar c'hamp,
Gant un den a oa e anv Goazgaram.

Dugez Anna a lavare
Da wreg ar c'hanolier neuze :
Aotrou Doue ! petra vo graet ?
Setu ho pried paour bet tizhet !

Na pa ve va fried marv,
Me raio va-unan war e dro
Hag e ganol me e gargo,
Tan ha kurun ! ha ni welo !

Ne oa ket he ger peurechuet,
Ar mogerioù oa bet freuzet,

Hag an norioù oa bet torret
Ha leun ar gêr gant soudarded.

Deoc'h, soudarded, ar merc'hed koant,
Din-me an aour hag an arc'hant,
Eus holl deñzorioù kêr Wengamp,
Hag ouzhpenn ar gêr hec'h-unan !

Dugez Anna en em strinkas
War he daoulin, pa e glevas :
Itron Varia Gwir Sikour,
Ma plijfe ganeoc'h dont d'hor sikour !

Dugez Anna adal pa glevas,
etrezek an iliz a redas
Ha war he daoulin en em stouas,
Ha war an douar yen ha noazh :

Ha c'hwi garfe, Gwerc'hez Vari,
Gwelout ho ti da varchosi,
Hag ho sakristi da gav gwin
Hag hoc'h aoter vras da daol gegin ?

Ne oa ket peurlâret he ger,
Ma teuas ur spont bras e kêr
Gant un tenn kanol oa bet laosket
Ha nav c'hant den a oa bet lazhet

Ha gant ar strak an euzhusañ,
Ha gant an tiez o krenañ
Ha gant son vrall an holl gleier,
A oa o seniñ oc'h unan e kêr.

Floc'hig, floc'hig, floc'hig bihan,
Te a zo prim, skañv ha buan,
Kerzh timat da veg an tour plat,
Da c'houzout piv zo o vreañsellat.

Ouzh da gostez 'z eus ur c'hleze,
Mar kavez unan bennak aze,
Mar kavez unan bennak o son,
Plant da gleze en e galon !

O vont da grec'h, eñ a gane,
O tont d'an traoñ, eñ a grene
Da veg an tour plat ez on-me bet,
Ha den ebet n'am eus gwelet;

Ha den eno n'am eus gwelet,
Nemet ar Werc'hez venniget,
Ar Werc'hez Vari hag he mab, avat,
an daou-se a zo o vreañsellat.

Ar priñs diwirion a lavaras
D'e soudarded, pa'z e glevas :
Sternomp hor c'hezeg, ha dav d'an hent !
Ha lezomp o zier gant ar sent

JENOVEFA RUSTEƆAN

Pa oa Yannig gant e zeñved
Ne oa ket e soñj da vezañ beleget

Ne vin avat, na beleg na manac'h
Lakaet em eus va spered en ur plac'h

Bravañ merc'hed a oa er vro-se
Merc'hed aotrou ar Faou a-neuze

Ar yaouankañ, honnezh ar vravañ
Yannig Kenvleiz a gar a glevan

Pa oa Yannig o vont d'an urzhioù
Jenovefa oa war e dreuzoù

Da gemer an urzhioù na 'z it ket
En abeg d'hon amzer dremenet

Distreñ d'ar gêr me ne c'hellan ket
Pe vin lakaet da c'haouiad touet

Kollet ho peus eta ar walenn
am boa roet deoc'h e-kreiz an abadenn

Ho kwalenn aour n'am eus ket kollet
Doue en deus-hi diganin tennet

Hag o tont en-dro eus a Gemper
E teuas adarre d'ar maner

Me zo deuet d'ho pediñ, d'an deiz
Da zonet d'am oferenn nevez

An oferenn a zo deraouet
Hogen hec'h echuiñ n'en deus gallet

Hogen hec'h echuiñ n'en deus gallet
Gouelañ da Jenovefa en deus graet

Ha trí levr bras en deus treuzet avat
Gant an daeroù eus e zaoulagad

Ken e teuas ar plac'h o redek
Hag e kouezhas da zaoulin ar beleg

En anv Doue ! Yann, distroït en-dro!
C'hwí 'zo kiriek, kiriek d'am marv

An aotrou Yann Flecher a zo person
Person eo bremañ, e bourc'h Nizon

Meur a wech em eus e welet o ouelañ
Tostik-tost da vez Jenovefa

Pennhêrez Keroulaz

Gwelout ivez (testenn glok)

1. Ar bennhêrez a Geroulaz
He devoa un diduell vras
En ur c'hoari diouzh an difisez
Gant bugale an aotrounez
2. Evit ar bloaz n'he deus ket graet
Rak he danvez ne aotre ket
Emzivadeg eo a-berzh tad
Grad-vat he c'herent a ve mat
3. "Ar bennhêrez a Geroulaz
He deus hiziv plijadur vras
o tougen ur sae satin wenn
Ha bleunioù aour war he fenn"
4. Evel-se e komzed er sal
Pa zeue ar bennhêrez er bal
Rak markiz Melz oa erruet
Gant e vamm hag e heul bras-meurbet
5. "Me garfe bezañ koulmig c'hlas
War an doenn a Geroulaz
Evit klevout ar gomplidi
Etre e vamm ha va hini
6. Gant e vad hag e anv brudet
Ar markiz-se din ne blij ket
Hogen Kerdomaz pellik zo
a garan a garin atav
7. Me garfe bezañ eostig-noz
El liorzha war ur bodig roz
Pa zeufe da zastum bleunioù
Ni 'n em welfe eno hon-daou
8. -- Me garfe bezañ krakhouad
War al lenn ma walc'h he dilhad
Evit glebiañ va daoulagad
Gant an dour a c'hleb he daoudroad"
9. Ar bennhêrez a lavare
D'he mamm itron, en devezh-se :
"Abae m'emañ ar markiz amañ
eo deuet va c'halon da rannañ
10. Va mamm itron, me ho ped,
Da varkiz Melz n'am roit ket
Va roit kent da Ber ar Run
Pe, mar kirit, da Salaun
11. Va roit kent da Gerdomaz,
Hennezh en deus ar muiañ gras
En ti-mañ e teu alies
Hag e lezit din ober lez
12. -- Va merc'h, ankouait an holl-se
Tra kent ho mad na zalc'han-me
Roet ar ger, pep tra zo graet
Da varkiz Melz e viot dimezet"
13. Itron Keroulaz a gomze
Ouzh ar bennhêrez evel-se
Rak evez oa en he c'halon
Ha Kerdomaz a oa he mignon
14. "Ur walenn aour hag ur sined
Gant Kerdomaz voe din roet
O c'hemeris en ur ganañ
Me o azroy en ur ouelañ
15. -- dal, Kerdomaz, da walenn aour,
Da sined, da garkanioù aour,
N'on ket lezet d'az kemeret
Mirout da draoù ne zlean ket"
16. Kriz a galon neb na ouelje,
E Keroulaz neb a vije
o welout ar bennhêrez kaezh
o pokat d'an nor pa'z ae er-maez
17. Ar bennhêrez a lavare
E Kastell-Gall, daou viz goude :
"Ne gavfen ket ur c'hannader
Evit dougen d'am mamm ul lizher ?"
18. Koulskoude ul lizher a skrivas
Hag e berr d'ar floc'h e roas
Gant gourc'hemenn evit e gas
Raktal d'he mamm e Keroulaz
19. Pa erruas al lizher ganti
e oa er sal oc'h ebatif
Gant lod tudjentil eus ar vro
Ha Kerdomaz a oa eno
20. Pa voe al lizher ganti lennet
Da Gerdomaz he deus lavaret :
"Lakait dibrañ kezeg raktal
Ma'z aimp fenoz da Gastellgall"
21. Itron Keroulaz a c'houlenne
E Kastell-Gall pa errue :
"Petra nevez zo en ti-mañ
P'eo stegnet ar perzhier er c'hiz-mañ ?
22. -- Ar bennhêrez oa deuet amañ
a zo marv en nozvezh-mañ
-- Mard eo marv ar bennhêrez
Me eo ar wir lazherez !
23. Meur a wech din he doa lavaret :
Da varkiz Melz n'am roit ket
Va roit kent da Gerdomaz
Hennezh en deus ar muiañ gras"
24. Kerdomaz hag ar vamm gablus
Skoet gant un taol ken mantrus
'zo en em ouestlet da Zoue
En ur c'hloastr, a-hed o buhez.

MARU PONTKALEK

UR WERZ A ZO NEVEZ SAUET
TREITOUR A ! Mallozh dit 'ta *diw wech*
WAR VARKIZ PONTKALEK EO GRAET
TREITOUR A ! Mallozh dit, mallozh dit
TREITOUR A ! Mallozh dit 'ta *diw wech*

WAR VARKIZ GAOUANK PONTKALEK
KER BRAU KEN DRANT KER KALONEK

MIGNON E OA D'AR VRETONED,
D'AR VOUC'HIZIEN NE LÂRAN KET

D'AR VOUC'HIZIEN NE LÂRAN KET
A ZO A-DU AR C'HALLAOUED

LAKAET EN DEVOA EN E BENN
DISAMMAÑ DEOMP-NI HOR HORDENN

UR PAOUR EUS KÊR O KLASK E VOUEÐ
HENNEZH EN DEUS E ZISKALLET

HA PA OA DEGOUEZHET E NADONED
E VOE BARNET HA KONDONET

MARU DA ZAOU ULOAZ WARN USENT
'VEL AR VERZERIEN HAS AR ZENT

MARU NEB A SARE E URO
HAS HE C'HARAS BETEK E VARU

GWERZ SKOLVAN

Skolvan, Skolvan, hag e baeron,
zo deuet o-daou da c'houll pardon,
zo deuet da chom e kreiz ul lann
E-kichen Forest Kaniskan
E-kichen Forest Kaniskan

Pa 'z ae mamm Skolvan d'he farkoù
kavas an tan war ar c'hleuzioù
kavas an tan war ar c'hleuzioù

Va bennozh hag hini Doue
D'an neb en deus ho lakaet aze
nemet va mab Skolvan a vefe ?

Pa 'z ae mamm Skolvan davit dour
kavas ur feunteun e toull he dor

Va bennozh hag hini Doue
D'an neb en deus ho lakaet aze
nemet va mab Skolvan a vefe ?

Pa 'z ae mamm Skolvan da gousket
Terrupl-holl veze okupet

Piv 'zo aze, piv da aze
Ken diwezhat-se war 'r vale
met ha va mab Skolvan a vefe ?

Tavit va mamm na ouelit ket
Ho mab Skolvan zo deuet d'ho kwelet

Mard eo va mab Skolvan zo aze
Va mallozh d'añ dont alese

Ne oa ket c'hoazh he ger peurlavaret
E dad paeron en deus rankoñtret

Va filhor kaezh deuit war ho kiz
Ha me c'houlenco evidoc'h eskuz

Va c'homer baour, krisat oc'h c'hwi
Pa ne bardonit d'ho krouadur
Pa ne bardonit ket d'ho krouadur

Penaos Doue m'hen pardoniñ,
D'ar gwalleurioù en deus graet din ?

Seizh iliz parrez 'n deus entanet !
Ha nav bern ed en deus devet,
N'eo ket c'hoazh e oa e vrasañ pec'hed

Lakaet an tan em zi forn,
Devet triwec'h a loened-korn !
N'eo ket c'hoazh e oa e vrasañ pec'hed

Gwallet teir dimeus e c'hoarezed
Ha lazhet o inosanted
N'eo ket c'hoazh e oa e vrasañ pec'hed

Aet d'an iliz ha torret holl ar gwer
Lazhet ar beleg ouzh an aoter
N'eo ket c'hoazh e oa e vrasañ pec'hed

Va levr bihan en deus kollet
Ya, skrivet gant gwad hor Salver
Hennezh a oa e vrasañ pec'hed

Tavit va mamm na ouelit ket
ho levr bihan n'eo ket kollet

emañ er mor don tregont gourhed
emañ er mor don tregont gourhed
e beg ur pesk bihan o viret

Tavit va mamm na ouelit ket
emañ war an daol ront, ay eo renket
Faota barzh met teir follenn c'hlebiet

Unan gant dour, unan gant gwad,
Unan gant daeroù ho taoulagad

Va bennozh a roan d'am mab Skolvan
Pa 'z e adkavan va levr bihan
Pa 'z eo kavet va levr bihan

Pa gan ar c'hog d'an hanternoz
e kan an aeled er Baradoz

Pa gan ar c'hog da c'houlou-deiz
e kan an aeled dirak Doue
Ha Sant Skolvan a ra ivez